




PHOTO JOS LE DOARÉ

Kalvar Sant Veneg en e gaera dindan heol flamm an nevez-amzer.

BLEUN-BRUG

Niv. ⁹⁰90 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 fr.

EBREL - MAE 1956

TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1956 ?

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell d'eoc'h beza ezel eus ar Bleun-Brug pe rei d'eomp skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Sant Visant Ferrer, gant Konhoiarn	1
Istor ar Bleun-Brug, gant L. Lok	8
Teñzor Ienn Meilh-ar-Roc'h, gant Y. ar Gow	6
Pedenn ar Misioner, gant G.-M. Trebaol	10
Lennet evidoc'h	10
Kañvou	12
Keleier	14
Emgleo Breiz hag ar Reizskrivadur, gant Gab. ar Moal	16
De profundis, gant Moualc'h ar Sklêder	17

Ar re n'o deus ket paet o c'houmanant 1956, a gavo amañ eur baperenn roneoskrivet da zigas dezo da zañj e vankont arc'hant deomp. O fedi a reomp da baea raktal. Ma ne reont ket, e vo kaset dezo, a-benn eur miz goude, eur chechenn da baea dre ar faktour.

Bleun-Brug C'hwvrer, ha Bleun-Brug Meurz a zo bet niverennet fall. Elec'h 89 ha 90, lakit warno 88 ha 89. Houmañ eo an niverenn 90.

Tud yaouank, kemerit perz e konkourioù ar **BLEUN-BRUG**,
E **KOMBRIT** d'ar 24 a viz Even, hag e **KARNAG** d'an 29 a viz Gouere.
E **KLEDER** d'ar 17 a viz Even,

KAN-POBL, RIMADELLOU ha **PREZEGÈRÈZ** a zo evidoc'h.

20.000 LUR a zo da c'hounit evit ar prezegèrèz.



133681

BRO-VREIZ ha BRO-spagn a-unan o kana meuleudi da sant visant ferrer


D'an 29 a Vezeven diweza e tegoueze ar pempkantvet deiz-ha bloaz abaoe ma voe laket war roll ar Sent an Dominikad brudet Visant Ferrer.

E Valensia, kêr a Vro - Spagn e-lec'h ma voe ganet, ez eus bet graet, da geñver an devez-se, eur Gouel dispar en enor d'ar Zant.

Met an darn vuia eus e relegou a zo chomet el lec'h ma varvas, e kêr Gwened. Aes eo kompren neuze perak e voe degemeret gant kement a lid ar relegenn sakr ma 'z eo Penn ar Zant, ha gant kement a levez an hini a zouge anezi betek Valensia : an Ap. 'n Eskob Bellec, eskob Gwened.

Dre ma 'z ae kanaded ar Vretoned betek penn o beaj, ar gristenien a zere-de da saludi ha da enori ar Penn, ha da bedi evit peoc'h ar bed.

E Saragossa zoken, dre urz ar Jeneral Franco, e voe rentet d'ar Relegenn an enorioù a vez rentet da renerien ar broioù. Rak sant Visant Ferrer eo a lakas holl rouanteleziou Bro-Spagn d'en em douezia en eur rouantelez hepken.



Sant Visant Ferrer o prezeg er Folgoat
(Gwerenn livet Plouneour-Trez)

D'ar 27 a Vezeven ar Relegenn a voe degemeret gant Arc'heskob Valensia, endro d'ezañ holl bennadureziou an Iliz hag ar Vro, dirak eur 500.000 bennak a dud. En iliz-veur, an Ao. 'n Eskob Antoniutti, Kannad ar Pad e Spagn, a lennas al Lizer skrivet da bobl Valensia gant hon Tad Santel ar Pape Pi XII.

D'an 28 e voe graet dre gêr, gant ar Relegenn, eur brosesion vras, renet gant an Ao. 'n Eskob Bellec. Ministr al Leziou-Barn e Spagn ha Kannad Bro-C'hall a heulias ar brosesion-se. Tost da 600 parrez o doa degasset o c'hroaz.

D'an 29, a-benn an oferenn-bred, kanet gant Kannad ar Pab, edo degouezet an Ao. F. Decker, Maer Gwened. D'ar pardaez a thie beza gouestlet Bro-Valensia da sant Visant Ferrer. A-raok al lid bras-se, et voe degasset d'ar Sant ar profou, graet gant frouez an douar, evit ar beorien. Neuze, Ao. Maer Valensia a lennas ar bedenn-ouestla, evit rei da sant Visant rouantelez Valensia.

Ar Vretoned o deus kemeret perz ar goueliou-se o deus gellet gweled pegen beo eo c'hoaz an eñvor euz ar Sant en e vro c'henidik.

Hag en hon touez-ni, penaos emañ kont?

Daoust hag anaout a reomp eun tamm bennak buhez an hini a zeuas en hor Bro d'ober e brezegennou diweza hag ive da renta e huanad diweza?

Daoust ha prest omp da gemer perz, en doare ma vefe dleet, er Goueliou a vo graet d'ar 24 e zeu e Gwened? Merka 'r raint pemphantvet deiz-ha-bloaz ar mare ma voe savet euz ar bez Relegou sant Visant Ferrer, dirak hor c'henvroad, an Ao. Kardinal Alan a Goativi, Kannad ar Pab, ha dirak tud hag o doa gweled ha klevet ar Zant ez-veo.



Abostol an unvaniezh en Iliz
hag etre ar Broiou kristen :

Sant Visant FERRER

(1350 - 1419)

Eur spered dispar a zen o tiwana hag o vleunia en eur rouantelez vihan.

En amzer-se douar Spagn a oa rannet etre peder rouantelez : **Kastilhez, Portugal, Navarr**, hag **Aragon** gant **Bro-Valensia**. E rouantelez Aragon, e kêr Valensia eo e voe ganet, er bloaz 1350, **Visant Ferrer** (e galleg Ferrier). E dad, Gwilherm, a oa noter ; Konstansa Migel oa e vamm.

D'e 17 vloaz e krog gant e studiou evit beza Dominikad. Deski a ra skiañchou ar bed hag ar skiañchou sakr e Barselona. Peurechui a ra e studiou e Toloz, e-lec'h ma ra anaoudegez doun gant kelennadurez vrudet sant Tomaz Akwino (St Thomas d'Aquin).

Er bloaz 1378 eo beleget. Neuze, yaouank-flamm c'hoaz, e tistro da Valensia, e vro c'henidik.

E berr amzer e teu da veza brudet evit e ouiziegezh war ar Skritur Sakr ha skiañchou Doue, evit e brezegennou helavar hag e c'halloud da c'hounit d'ar feiz kristen ar Yuzevien, niverus d'an ampoent en Aragon. Ar roue a lak e fiziañs ennañ ; ar rouanezh ar d'ezañ hec'h ene da sturia. Dre eno en deus tro da zont da veza ampart war aferioù ar politikerezh. An holl a bleg dirak e santelezh.

An Iliz daouhanteret. Sant Visant a glask degas an unvaniezh.

Er bloaz 1378, ar gardinaled, e Roum, o doa dibabet, e-kreiz ar freuz, ar Pab Urvan VI. Met da-c'houde hiniennou anezo a zoñjas n'edo ket talvoudek o labour hag a zibabas eur pab all. Hemañ a gemeras an ano a Glemens VII hag a yeas da chom da balez Avignon. Pehini oa ar Pab gwirion? Den ne ouezo biken. Hervez Visant Ferrer — a skrivas neuze eul levrig diwar-benn ar gudenn se — Klemens VII an hini oa. Hag ar Zant a lakas rouanteleziou Kastilhez hag Aragon da blega da Bab Avignon. Met kalz broiou all a chome feal da hini Roum. Daouhanteret oa Rouantelezh an eneoù.

An disrann-se a dlje padout pell : 39 bloaz !!! An « Disrann hir » a vez graet anezañ. Rak eur wech maro Klemens VII, kardinaled Avignon e-lec'h anaout Pab Roum, a zizazas ar c'hardinal Per a Louna, kenvroad ha mignon da Visant Ferrer. Ar Pab nevez, kemeret gantañ an ano a Venead XIII, a c'halvas ar Zant da Avignon (1395).

Eno, e-pad pevar bloaz, Visant a boanio da gompesa an traoù, evit lakat unan pe unan euz an daou bab da rei e zilez. Rak spontus eo ar gaou a ra eur seurt kudenn ouz an Iliz santel, pep rouantelezh o veza o klask lakaat « he » fab da blega d'ez. Met ar Zant a wel hepdale e teu Benead da veza aheurtet. Neuze ez a kuit dioutañ, da brezeg d'ar bobl e trowardroioù an Alpou, betek ar Swis hag ar mor kreizdouar.

Tremen a ra dre hanternoz an Itali, en eur brezeg dre ma 'z a hag en eur genderc'hel gant e labour evit degas emgleo etre an daou bab. Da-c'houde e tistro d'e vro dre greisteiz Bro-C'hall.

Er bloaz 1409 e voder eur Sened-meur e kêr Pisa (Itali) evit lakaat ehan d'an Disrann. Eur pab nevez a zo anvet. Met o veza ma ne fell da hini ebet euz an daou bab koz rei e zilez, e vo hiviziken tri bab e-lec'h daou !!!

Abostol ar peoc'h en e vro.

Etre 1409 ha 1415, sant Visant a chom en e Vro. Lakaat a ra emgleo etre ar Gristenien, ar Yuzevien hag ar Vohammediz (pe « musulmaned »). E-touez ar re-mañ e ra kalz kristenien nevez.

Roue Aragon a varv hep heritour. Brezel a sav. Met ar Sant a gav eun danvez-roue e Kastilhez : ar priñz Ferdinand. Dont a ra a-benn da lakaat an holl da anaout hemañ da roue dre Emgleo Kapse (1411).

Unvaniezh an Iliz dreist pep tra.

Nebeut goude emañ bodet adarre pennadureziou an Iliz e kêr Konstañs, evit diskoulma kuderin an Disrann. En taol-mañ ar Sened a lam daou euz ar babed diwar o zron ; an trede, hini Roum, a ro e zilez. Unan euz ar babed didronet oa Benead XIII. Sant Visant en deus dal-c'het dezañ betek neuze. Met gweled a ra eo e zever dilezel anezañ. Daoust pegen diê e kav (betek koueza klañv) e pleg d'e zever. Warlerc'h ar Zant, holl vroioù ar Spagn a ra heñvel. Ar Sened a zibab neuze eur Pab nevez. Hag evelse emañ echu an Disrann.

« Galeour an Aotrou Doue ».

Pa zeu ar peoc'h d'an Iliz, sant Visant a zo dija koz : pemp bloaz ha tri-ugent bennak... Met bremañ eo digor dirazañ doriou Bro-C'hall.

Diwar vremañ e reno bemdez buhez eur beajour, en eur brezeg dre ma 'z aio. Rak ken dizesk eo deut an dud da veza war o relijion, ma 'z eo eur spont, hag a bep seurt dizurziou a zo bet skignet dre ar brezel kant-vloaz.

Diouz ar pardaez e kuitaio eur gêr evit mont d'eun all, heuliet gant eur c'hant bennak a binijennourien a bep renk, hag a zo boaz, en eur erruout en eur gêr, d'en em skourjeza dirak an holl. Skuiz-maro gant e zevez-labour hag ar veaj war gein eun azen, ar Zant a dremeno al lodenn vrasa euz an noz o pedi, o prederia, o studia. Nebeut e kousko. Antronoz ec'h oferenco, e prezego peder eurvez diouz reñk, e kofesaio, e tirouestlo aferiou, e pareo tud klañv. Hag en hent adarre diouz ar pardaez. Pebez buhez merzerius !

Met a-galon-vat eo ez a war-raok : « Bez' ez oun, emezañ, eur galeour war dachenn an abostolerez, eur galeour da Zoue ; met va galeou a blij din hag ho trugarekaat a ran, Aotrou Doue. Santout a ran ervat n'oun ket evit va labour, met trugarekaat a ran ac'hanoc'h da veza roet d'in ar frealzidigez dispar-se ma 'z eo beza damheñvel ouz ar C'hrist, rankout kemer skouer war e vuhez a Brezeger hag a Veajour... »

Bro-C'hall, e-lec'h ma laka sant Visant e dreid, a zo skignet drezi armeou ar Saozon. E Azincourt ar re-mañ o deus diskaret ar pep gouesta euz noblañs ar rouantelezh, ha bremañ en em ledont war ar vro. Ne'us nemet Dug ar Bourgogn hag Dug Breiz hag a vije gouest da herzel outo. An daou zug a zo douget d'en em glevout gant ar Saozon. Evit degas ar peoc'h endro, sant Visant a glasko lakaat an tri briñs da sevel eun emgleo padus etrezo ; rak Charlez, an « dofin », n'en deus galloud ebet.

Ar Zant a yelo betek Dijon, kêr-benn Yann Dispont, dug ar Bourgogn, hag ac'hano war-eeun etrezek Breiz, e-lec'h ma ren an Dug Yann V.

Sant Visant e Breiz.

Yann V kuzuliet gant Yann Valastreg, eskob Sant-Brieg, en deus pedet a-benn teir gwech ar Zant da zont da Vreiz.

Erruout a ra,, d'an 8 a viz C'hweyter 1418, e Naoned, e-lec'h m'eo degemeret gant an eskob, Herri ar Barvek. Chom a ra eno eiz deiz. En eur vont euz an eill kêriadenn d'eben, en doare m'hon deus gwelet, e tegouez, d'ar 6 a viz Meurzh, tri c'hilometr diouz Gwened, e-lec'h ma teu d'e ziambroug an Dug, an Dukez Janned, Amaury de la Motte eskob Gwened ha strollad-chalonied an iliz veur. Erruet d'ar sadorn a-raok pedervet sul ar C'horaiz, e chom e Gwened betek meurzh Fask. E-pad an amzer-se e prezego bemdez, e kofes an dud, e pare eur bern klañvougen. Divizout a ra ive gant an Dug diwar-benn ar peoc'h ha gwelout a ra e vefe ret dezañ komz gant roue Bro-Saoz. Hemañ 'zo d'an ampoent en Normandi.

Hag ar Zant adarre en hent etrezek an Normandi (20 a viz Ebrel). E miz Mae e tegouez e Kañ (Caen) dirak Herri V. Petra ' voe etrezo ? N'ouzomp ket. Met ar Zant a zistro da Vreiz, dre Vayeux, Coutances, Avranches. Gwelout ha klevout a raer anezañ adarre e Dol, Sant-Malo, Miniac. E Dinan e chom eur miz e kouent e Urz.

Da-c'houde e kendalc'h dre Jugon, Lamball, Monkontour, Sant-Brieg, Landreger, Sant-Brieg adarre, Kintin. E maner Joselin e chom eiz deiz. Ac'hano e tiskenn, dre Redon, etrezek an Naoned ha Gweran (Gérande).

Maro ar Zant.

War-dro Naoned ez eo tizet gant ar c'hleñved.

E heulierien a ro ali d'ezañ da zistrei d'e vro. E-kreiz an noz e loc'her kuit. Met goude ober eur pennad hir a hent, en em gavont el lec'h ma 'z edont en eur loc'ha. Ar Zant a anavez neuze youl Doue ha diougan a ra d'e dud e tle mervel e Breiz. Met a-raok en deus c'hoant da welout c'hoaz Gwenediz.

Dukez Breiz a zoug anezañ euz Naoned da Wened en he gweledouger. An derzien a chom gantañ e-pad dek devez. Kas a ra neuze ar vedesined diwar e dro, en eur soubla da youl Doue. Reseo a ra e Sakramañchou. Lenn a raer d'ezañ ar peder Basion, Salmou ar binijenn, Litanio ar re doc'hor.

E-barz ar gambr vihan emañ an Dukez Janned, bezkontez Rohan, diou pe deir itron all, hag heulierien ar Zant.

D'ar meurzh 5 a viz Ebrel e pign e ene da c'hloar ar Zant dirak tron an Dreinded sakr (1419).

An enoriou roet d'ezañ gant an Iliz.

Ar burzudou grêt gantañ ez-veo hag ar re a reas goude e varo a voe ken niverus, ma voe kaset a-bréd da-benn ar prosez a santelezh en e enor.

D'an 29 a Vezeven 1455 ar Pab Kallist III, genidik ivez euz Valensia, a lake e genvroad war roll ar Zant.

D'ar 14 a viz Gouere er bloaz war-lerc'h, ar Pab a gase, evel kannad, an Ao. Kardinal Alan a Goativi da Wened, evit sevel relegou sant Visant Ferrer ha ren ar goueliou en e enor.

Sant Visant Ferrer hag ar Vretoned.

En em skigna 'reas buan dre Vreiz an devosion da zant Visant. Chapelioù e-leiz a voe savet en e enor ha skeudennou a voe grêt anezañ e pep lec'h.

En hon amzer-ni, er-mêz euz eskopti Gwened, e seblant beza êt da ludu an devosion da zant Visant Ferrer.

Lavaret en doa koulskoude a-raok e varo :

« Ma chom feal ar Vretoned d'in, me 'gendalc'ho da veza o alvokad dirak lezvarh Doue betek fin ar bed. »

Daoust ha feal omp chomet dezañ ?

Dén ebet ne zeuio **a-lec'h-all** da c'hourc'hemenn d'eomp enori ha pedi an hini en deus graet kement a vad d'hor Bro.

D'eomp-ni eo kaout ar skiant-vat da ziskouez hon anaoudegez vat euz hor penn hon-unan. D'eomp-ni eo beza gouest da anaout talvoudegez an enor hon eus da virout betek ar Varn relegou eur Zant ken dispar...

KONHOIARN.

Tenzor lenn Meilh-ar-Roc'h

Hervez tud Sant-Toz ez eus eur varikennad aour hag arc'hant e goueled lenn Meilh-ar-Roc'h, du-ze er stankenn c'hlas a zo izelloc'h eget ar roz uhel ha plomm e-lec'h m'emañ chapel vihan an Intron Varia. Ha, war a leveront, eo diouallet an teñzor dispar-se gant eur mell silienn, hir meurbet ha kalz tevoc'h eget ma morzed.

Gant piou 'ta hag abaoe pe da vare eo bet kuzet an teñzor-se eno a-zirak daoulagad an dud ? N'em eus kavet kristen ganet ebet d'hen diskleria, hag ar meilher koz a oa kent o terc'hel ar veilh n'eo ket bet gouest, kennebeut, da roi netra da c'houzout diwar-benn kement-se.



Eur mare a zo bet, a-rôk ma oa grêt an hent bras a dremen bremañ etre ar veilh hag ar roz ha ma tiskenne homañ, krenn war-eeun, betek al lenn, emede Primel Gaonac'h, eur merourig berr ar stal gantañ, o terc'hel eun tam-mig douar e Kêrwern, war-bouez nebeut diouz chapel ar Roc'h. Hag eun deiz, war-bouez klevout ano dalc'hmat eus an teñzor burzudus, e tiouanas eur zoñj iskis en e benn.

Diës e oa beva ha, dreist-holl, resta arc'hant en e dammig atant ha, pa veze deuet *gouel an dudchentil paour*, e fazie bewech eun nebeud skouejou e yalc'h Primel evit kaout peadra da gas e ouel-mikêl d'ar perc'henn. Setu ma ree hemañ bec'h d'e verour ha ma c'hourdrouze, bep bloaz, klask an urcher war e dro da lakaat gwerza unan eus e zaou ejen evit kaout e zigoll.

N'en devoa Primel netra a dalvoudegez nemet eur c'houblad ejened kaer ha mat da labourat, ha lorc'h a oa ennañ ganto. Setu e holl zanvez hag eur rann-galon a vije bet dezañ koll hini pe hini anezo. Ha penôs en dije grêt evit labourat e zouar, ma vije bet didruez a-walc'h ar mestr da denna unan anezo digantañ ?

Er bloaz-se eta, dre ma tostae miz Gwengolo, e tiësae da spered Primel, rak platoc'h eget biskoaz e oa e yalc'h. Hep ehan e ruilhe hag e tiruilhe soñjou trubuilhus dre e benn, ankeniet gant an nec'h rak an amzer da zont dre an diouer a arc'hant. Hogen, goude beza prederiet e-pad pell, e teuas envor dezañ eus teñzor lenn Meilh-ar-Roc'h. « Ya ! » emezañ e-unan, « perak ne glaskfen ket an tu da besketa ar varikennad aour-se a zo kuzet el lagenn ? »



Ne jomas ket hiroc'h da dermal ha, goude beza sternet e zaou ejen ouz ar c'harr, e yeas ganto etremek ar veilh, eun tammig enkrez en e galon. Dre ma kerze gant an hent, e pede ar Werc'hez Vari hag e lavare bep eur mare : « Ma teuan a-benn da denna an teñzor eus an dour hag ar vouilhenn, e roin an hanter anezañ da Intron Varia ar Roc'h ! » Ha, leun a fiziañs, e tigouezas e-kichen al lenn, e-lec'h ma stagas e lôned ouz eur vodenn haleg.

Hep chom da yari na da varc'hata, e tiwiskas e zilhad ha, gant eur mell keuneudenn en e zorn, e tiskennas e-barz an dour. War evez emede ha mat a reas rak ne zaleas ket ar zilienn da zilammat warnañ eus a-douesk ar pri, o klask e zanta gant he genou ledan ha leun a zent hir ha stank, ken lemm hag aotennou.

Kerkent e lakeas Primel sin ar groaz en e gerc'henn hag, e-ser darc'hoi eur mell taol war benn ar zilienn, e lavaras : « Dre c'halloud Intron Varia ar Roc'h,

ra vo friket an amprevan-mañ ! » Ne voe ket dao dezañ skoi diou wech ; tra-walc'h e oa bet ar mestaol he devoa tapet ar zilienn evit he divella hag he lakaat da reuda. « Lipet eo he loa ganti ! » eme Brimel neuze, fougeet dezañ, en eur gerzout da greiz al lenn.

Eno, dindan e dreid, e kavas eun dra galet hag en devoa doare da denna d'eur fustailh. Hag heñ da bloma war e benn en dour, don-bras en takad-se. Tapout a reas peg er pez a gavas e zaouarn, da lavarout eo ar varikenn, hag, o burzud ! daoust da homañ da veza pounner meurbet, e yeas gantañ hep muioch a vec'h eget ma vije bet eur vriad plouz.

P'en em gavas Primel war ribl al lenn, e taolas e deñzor war ar c'haled hag e wiskas e zilhad. Leun-barr e oa e galon gant al levezeg ha ne bade ket gant ar blijadur : deuet e oa gantañ e daol da-vat. Hep an distera diëzamant ha souezet-mar o welout pegement a nerz a oa deuet dezañ, e kargas ar varikenn er c'harr. Goude e lavaras yao d'e zaou ejen hag heñ ganto war-zu ar grechenn a zo a-uc'h d'al lenn. Mont a ree an daou lôn war o fouezig, hep nemeur a vec'h, ken ês ha ma vije bet goulo ar c'harr a oa d'o heul.

War a lavare ar re goz, gwechall :

*Ar paour, pa binvidika,
Gant an diaoul a ya.*

Techet on da gredi eo gwir-bater kement-se rak, dre ma tostae Primel ouz lein ar roz, e teue eus e c'henou komzou sebezus. « Kreñvik a-walc'h, a gredan », emezañ, « am eus prometet d'an Intron Varia evit he lod, rak gant piou eo bet grêt al labour nemet ganin-me ? Me ' zoñj p'am bo profet dezi er plad eul louiz aour a ugent lur pe zaou, da zeiz he fardon, he devo bet he digoll diganin ! »

Siouaz ! ne oa ket echu gantañ distaga ar c'homzou dizagr ha dizanaoudek-se ma welas e garr o tidala hag ar varikenn bounner o vont a-ruilhou, mell-divell, d'an traon gant ar roz. Dre ma tiskenne etremek ar stankenn, e stirliñke laouen enni ar peziou aour hag arc'hant, e-giz ma vijent bet oc'h ober goap eus ar paour kêz Primel, mantret e galon ha kouezet ar zabatur warnañ dirak ar gwall-zarvoud.

Koueza a reas war he fenn e-barz al lenn, oc'h ober eun trouz spontus hag o strinka dour ha lagenn a bep tu. Don-bras e sankas er goueled, e-fouesk ar pri hag al lec'hid, e-lec'h ma tiskennas ive d'he heul ar zilienn vras divorflet war an taol hag a zo eno abaoe, war a leverer, o tiouall an teñzor prizius a zo chomet enni.



Hag, allas ! er bloaz-se e teuas an urcher da lakaat foar war stal Primel gêz, reuzeudik ha paour-raz hag o keuzia en aner d'ar gwall-fazi en devoa grêt o nac'h ouz an Intron Varia ar pez a dlee dezi.

Yeu ar Gow.

PRENIT DIGANEOMP

Buhez Hor Salver Jezuz-Krist (600 lur). — Buhez an Aotrou Perrot (900 lur franco). — Histor Breiz, an Ao. Poisson (750 lur). — Yez hon Tadou (345 lur). — Le Breton par l'Image (250 lur). — Me a zesk brezoneg (250 lur). — Fatima (250 lur). — Buhez skeudennet St Fransez (250 lur). — Sant Fransez Mignon ar Vugale (200 lur). — Santez Elizabet (50 lur). — Diwar c'hoarzin (300 lur). — Dindan ar Kask : Lexique breton. — Français et français-breton (nevezenti vrasa ar bloaz evid or yéz).

ISTOR AR BLEUN-BRUG

Diazeour ar Bleun-Brug war hent karantez Breiz

E miz even 1896, savet oa bet gant eur vreuriez koz, an « Association Bretonne », eur « Comité de Préservation du breton » ha neket hebken war baper e oa, renet m'oa gant *Fanch Vallée*. Hemañ, goude beza goulennet kuzul digant kloareged Kemper a zigoras, e 1897, eur skol vrezonek e skolaj Sant-Charlez e Sant-Brieg. Kenta skoliad Vallée a voe *Fanch Jaffrennou*, barz Taldir, aozer ar *Bro-Goz*, *Dalc'h-sonj* hag all...

Presiusa skoazell a deuas d'ar C'homite a-berz brudeta den a oa neuze etouez an dud desket war ar yezou keltiek eo *Josef Loth*, eur gwenedour, dean skolveur Roazon. Dirag kendalc'hidi an « Association Bretonne » n'en doa ket bet aon da ziskleria ne vije saveteet ar brezoneg nemet dre zigeri dezañ dor ar skoliou, re ar c'houarnamant.

Ha setu prestik goude, *Kroaz ar Vretoned* o tont (1898) ha d'an 13 a viz eost an « Union Régionaliste Bretonne » e Montroulez, pennou bras en he fenn : *Anatol ar Braz*, *Ar Goffig*, *Tiercelin*, *Botrel*, *Vallée*, *Le Clerc*, *Buleon*, *Jaffrennou*, *Abalor*.

Petra o doa soñj ober ? Lakât ar Vretoned da anaout o bro e pep giz ha d'he c'haret, d'o hench warzu an amzer da zont heb nac'h an amzer drementet.

Skei mad a rejont. Eur bern tud a dridas, an dervez warlec'h, e Plouyann, o selaou diskleria *Mister Sant-Gwenole*. Ar brud eus ar gouel a redas e pep korn Bro-C'hall hag er broiou estrenn rak kazetennerien e-leiz a oa diredet da Blouyann hag a oa bet chomet sebezet o welet Bretoned diwar ar-mêz o tiplega gant kement a skiant hag a vuez eur pezh-c'hoari euz ar seurt-se.

Bloaz warlerc'h, Pôtrede Plouyann a c'hoarias *Santez Trifina hag ar Roue Arzur*. Ar brud avat a yeas an dro-mañ kentoc'h gant pôtrede Sant-Varzin Montroulez c'hoariet ganto, diou pe deir gwech, *Mab Prodig* an aotr. *Brignou*.

E keit-se, renevezet 'oa bet ar mignouniaj etre Bretoned hor c'horn-bro ha Bretoned Bro-Geumri. Tri war n' ugent breizad a yeas da Gardiff da gemeret perz e goueliou bras broadel anvet *Eisteddfodd*, goueliou hag a vez heuliet gant eur mor a dud bep bloaz. Pôtrede Keumri a zeuas eur miz goudeze d'ober eur gwél da Vreiz (1899).

Kenveuriez ar Studierien vreton Roazon hag ar *Gorsedd* a oa ganet er memez mare.

N'eo ket danvez Breiz a ree diouer eta d'ar c'hazetennoù na, dre-ze, boued broadel d'ar Vretoned. Eur gazetenn, war he c'henta lamm, an *Ouest-Eclair*, moulet e Roazon, ha c'hoant ganti en em astenn war bep korn a Vreiz, a *embanne brezoneg*. Skol vrezonek a oa e Landreger, e Gwengamp. Botrel, daoust dezañ da veza kaner galleg hebbken, a roe luf da Vreiz kement a dud a veze e Bro-C'hall hag er broiou estrenn ouz e selaou o kana.

✱

Hag en eskopti Kemper ha Leon penaos e kerze an traou ? Ne jome ket dizeblant darn euz ar veleien. Laiked ive, a du ganto, a wele gant rann-galon ar brezoneg o koll tachenn. En em voda a rejont, bep an amzer, skriva rejont er c'hazetennoù, sevel a rejont strolladoù c'hoarierien. Da viz mae 1899, e Landerne, sevel a rejont eur vreuriez « Œuvre pour la préservation et la diffusion du breton dans le diocèse de Quimper et de Léon » hag en em entent a rejont evit ma vije embannet a nevez ar gelaouenn *Feiz ha Breiz*, *kouezet* en he foull e 1884, goude ugent vloaz buez.

Mistouet evit miret ouz ar Vretoned da veza morgousket, eur ministr, *Combes* e ano, a glaskas trabaz ouz ar relijion. Eun hent treuz a gemeras evit-se. Ar veleien, en amzer-ze, a veze paet gant ar c'houarnamant. N'oa ket bras o c'houarnamant. Divizet e voe gant *Combes* e vije lammet o fæ digant ar re a

rafe gant ar brezoneg en iliz. Soñjal e c'hellit peseurt digemër e voe graet d'eun urz ken divalo. Enebi ouz ar relijion war zigarez enebi ouz ar brezoneg.

Setu penaos edo stad ar vro pa voe beleget Jean-Marie Perrot. Ar pennad istor-mañ a oa ret e rei da anaout evit entent penaos eo bet henchet an aotr. Perrot warzu karantez Breiz. Ne c'heller ket dispartia eun dén hag e oberou diouz tud, oberou ha darvoudou e amzer.

✱

Ganedigez, gourvadez, badiziant ar Bleun-Brug

Ne voe an aotr Perrot nemet eun nebeut miziou kure er Forest-Landerne araok beza kure Sant Noug. Daou vloaz a oa edo an aotr *Cardinal* person ar barrez. Ginidik a Wiklan, bet oa bet an aotr. *Cardinal* rejant e Kastell-Paol, kure ar Wourc'h-Wenn, rener skolaj Keroulas e Kastell.

Ar c'hure nevez, degouezet en e barrez e penn kenta 1904 a ziskouezas abred pe seurt den e oa ha petra e sonje ober : evel en eun toullad parrezioù a Vro-Leon ha zoken a Vro-Gerne (Sant-Varzin Montroulez, Gwitalmeze, Lanniliz, Pleyber-Krist), kaout e Sant-Noug eur strollad pôtrede yaouank, c'hoarierien peziou, dibunerien istoriou ha fentigelloù, kanerien...

Kerkent hag ar 25 a viz C'hwevrer 1904, ar *C'hourrier* a embanne roll eur gouel a vije e porz maner bras Keryann d'ar 7 a viz Meurz. Perc'henn ar maner a oa an aotr. a Goatgoureden, mear ar gomun. Da zeiz Morlarjez e voe c'hoariet « *Mab Prodig* » an aotr. *Brignou*, person Laneufret, eur pezh-c'hoari hag a oa bet kement a dud, ouz e zelaou e Montroulez. Eur pezig all a voe c'hoariet : « *Alanig al louarn* », diwar dorn an aotr Perrot e unan. Ar *C'hourrier* a zisklerie ebken e oa « *Alanig* » oberenn « un docte et jeune celtisant ». Kanet e voe etre an arvestou.

Da beurachui an abadenn, eun daolenn yeo : « *Apothéose de la Bretagne* », « *Gloar da Vreiz* ». An holl o kana « *Sao Breiz Izel d'an neac'h da vanmielou* ».

Ne vezo ket ankounac'hê seurt dervez gant ar 4.000 dén a oa e porz bras Keryann, a skrive ar *C'hourrier*.

Abadenn all d'ar 25. An dro-mañ, avat, glao a gouezas ; ne viras ket ouz eur milier bennak a dud da zont da Geryann.

Pôtrede Sant-Noug a yeas goudeze, d'ar 25 a viz Ebrel, da *Bloueskad*, ha d'ar 6a viz Eost da *Gastell*, da zibuna o feziou-c'hoari.

Ne oa ket c'hoaz, e Sant-Noug meneg ebet eus « *Blèun-Brug* ». Adalek miz Gwengolo, avat, kazetennoù Breiz a gonte d'o lennerien doareou eur c'hendalc'h bet e *Caernarvon* e *Bro-Geumri*. Ar c'houec'h skourr a ouenn geltiek a oa eno ; en o zouez Bretoned. Klask a rejont eur merk pe arouez d'en em anaout kenetrezo hag a vije da veza douget a wel d'an holl p'o dije d'en em voda. Eur vleunienn a ziwane er c'hwec'h bro geltiek ar bleun-brug. Hiviziken eta e pep kendalc'h grêt gant hini pe hini euz skourrou ar Gelted, ingalet e vije bokedou bleun brug d'ar bobl deut d'ar gouel ha grêt e vije al le da zerc'hel an unvaniez etre ar c'hwec'h skourr. Ar gouel, anvet gouel ar c'houn pe eñvor, a vije bep bloaz d'an 29 a viz Gwengolo, dervez Sant Mikael, patron ar Gelted. An dra-ze a c'horvezas e *Caernarvon* d'an 28 a viz Eost 1904.

Eur miz goude Bretoned an Union Régionaliste Bretonne en em vode e Gourin, Bro-Gerne, gant Pôtrede ar Gorsedd, d'an 9 a viz Gwengolo. Lodennet e voe bleuniou brug da zelaourien ar gouel lidet e Sant Mikael Priziac goude gwelet c'hoari « *Ar Mab Prodig* ».

L. Lok.

PEDENN AR MISIONER

Ho mouez am eus klevet... Roit din eun nerz santel,
Va Doue : mond a rankan ;
Réd eo din mond du-hont, pell-pell diouz Breiz-Izel,
'Vid kas, gand hoc'h Hano, sklêrijenn an Aviel...
Ar brezel,... ar maro : setu va lod bremañ.

Dirag hoc'h Aoter zakr, eun deiz a levenez,
E ris al le, Aotrou ;
Méd, pa deu ar mare d'ober ho polontez,
Perag em ene paour ' teu an dristidigez,
Perag em daoulagad e teu puilh an daerou?...

Hen touet am eus, gwir eo ; méd ato em c'hreiz
E lamm kalon an den ;
Ha, pa rankan kwitaad kement ' zo evidon
Ken kër ha buez, na pebez rann-galon !
An dra-ze ' zeblant din re galet planedenn...

Méd nann, na leñvomp mui... Ho tiskibl ' dle bezañ
Prést da bép seurt kimiad.
Diframma 'r bec'herien euz a skilfou satan,
Daoust ha ne dalfe ket eun enor 'vel he-mañ,
Hirvoud ha melkoni ha glac'har eun tachad?...

Oh ! resevit eta 'r zakrifis ken dister
A ra deoc'h ho peleg...
D'ho tro, o va Doue, bennigit va zud kër ;
Ha roit da vugale Kerne, Leon ha Treger,
Gras da veza bepred kristenien galoneg !...

G.-M. Trébaol, o. m. i. (nevez êt da anaon).



lennet evidoc'h

Diwar « Korn-boud ».

De nouveau le Pape encourage le folklore.

Les buts que poursuit notre Bleun-Brug ne sont pas d'ordre un'quement folklorique, comme le croient certains informateurs mal renseignés, puisqu'il s'est donné pour tâche, nous l'avons dit et répété, d'animer spirituellement tous les Mouvements ou Groupements qui s'intéressent à la matière de Bretagne. Comme eux et avec eux, il s'efforce, certes, de conserver et de faire mieux connaître nos traditions, nos costumes, notre langue et l'âme de notre peuple. Mais il a conscience, en souvegardant et en défendant ainsi l'âme bretonne, de rendre en même temps gloire à Dieu.

En recevant, il y a trois ans, les participants du Festival international du Folklore qui venait de se tenir à Nice, le Pape avait prononcé un discours dont nous avons le droit de conclure qu'il approuvait et encourageait nos efforts. Or, voici que tout récemment le Souverain Pontife vient de confirmer ses directives en ce domaine. Des danses populaires espagnoles ont été exécutées en son auguste présence par un groupe de

jeunes filles d'Action Catholique espagnole participant au Congrès mondial de Jeunes Femmes Catholiques.

Le Pape commença par remercier ces jeunes filles, en leur langue, du spectacle qu'elles venaient de lui offrir. Puis il déclara :

« A une époque où on se livre à tant de sottises au détriment de la moralité et de la dignité humaine, dans un domaine parallèle au vôtre, Nous ne pouvons que vous féliciter de manifestations résumant en elles de façon artistique les traditions très respectables qui peuvent renfermer parfois un contenu spirituel plein de grâce et d'expression. »

Sa Sainteté a même ajouté :

« C'est là une œuvre qui n'est pas indigne de l'Action Catholique qui doit se rendre compte de l'urgence de l'apostolat dans tous les domaines. »

Nous avons eu l'occasion d'écrire dans *Korn-Boud* que les Cercles Celtiques et autres groupements analogues pouvaient, en un certain sens et toutes proportions gardées, être considérées comme un « milieu » spécial d'Action Catholique. Nous ne pensions pas que, sans le savoir, nous faisions écho à la pensée pontificale. Nous en prenons acte avec fierté et avec joie.

K. B.

Diwar « Rollet ».

...Elle est curieuse, cette subite survie du passé dans un présent tendu vers le progrès conquis à tout prix. Est-ce crainte d'un avenir dont on commence à redouter les mystérieuses menaces, alors que l'on n'en attendait, jadis que de miraculeux bénéfices ? Est-ce revanche d'une simplicité sur la complexité croissante des trouvailles et des recherches de l'esprit ? Est-ce encore fièvre de l'imagination en quête de spectacles où l'irréel fait échec au positivisme de la vie quotidienne ?

Toujours est-il, pour ne citer que ces exemples, que les *Fêtes de la Cornouaille* à Quimper, ou celles du *Bleun-Brug* (Fleur de Bruyère) à Landivisiau, avaient attiré des foules énormes communiant dans le même esprit et trouvant une intense joie à l'association de la beauté plastique et des jeux de la musique. Musique simple, sans doute, nourrie de modes ancestraux, empruntant au chant populaire sa ferveur, son pouvoir irradiant. J'ai vu des personnes, blasées pourtant sur bien des choses de l'art, bouleversées par des chants dont l'étrange mélancolie alternait avec l'enjouement !

Spectacles, légendes, souvenirs locaux étaient rappelés au cours de ces évocations folkloriques où l'appel de la musique brodait son pouvoir. Serait-ce là une indication pour des manifestations collectives plus affirmées ? Le théâtre lyrique est devenu un art bien coûteux. Il déçoit souvent. Le cinéma verse toujours plus dans la redite, dans le factice des procédés, des sujets, des moyens, des attitudes. Il déçoit, lui aussi. Aurait-on soif d'un art plus frais, moins adonné à l'artifice, en prise soutenue avec des joies plus directes, moins fermentées ? Les Grecs pouvaient se flatter de posséder un art qui s'adressait à tous. Pourquoi le rappeler à propos de fêtes folkloriques ? N'est-ce pas imprudence d'invoquer l'histoire pour chercher aujourd'hui quelque active semence, détentrice de forces mystérieuses dont l'atome, dans un autre domaine, nous offre l'extraordinaire présence ?

Paul LE FLEMM.

Diwar Kannad al Likez.

...Je voudrais d'abord que vous soyez fier d'être de cette Bretagne, de cette vieille terre, de cette terre de la foi, de cette terre de la tradition. Je voudrais que vous n'ayez pas de complexe d'infériorité vis-à-vis de Paris...

Vous devez être fiers de votre province, vous devez être fiers de votre langue. Comme j'ai souffert l'autre jour en écoutant un vieux paysan dire : « La langue bretonne, tout ça c'est du passé ; il ne devrait plus y avoir, en quelque sorte, qu'une seule langue, non seulement en France mais en Europe. » C'est une conception de l'unité qui ne doit pas être la nôtre, cette unité qui consiste à faire des hommes des numéros et à sacrifier toute cette diversité qui est pourtant la marque du Créateur. Vous devez donc être fiers d'être Bretons.

Darn euz prezegenn an Ao. André MONTEIL,
da skouldi al Likez, da zelt rannidigez ar prizioù e 1955.

KANVOU

an doctor jozef regnault

(1876-1956)

D'ar 4 a viz C'hwevrer eo aet da anaon an doktor Jozef Regnault. Ganel e oa e Roazon e 1876, en eur familh kristen birvidik. E dad an D^r Regnault, lesanvet « medisin ar beorien », a oa anavezet en diavéz eus Roazon ha Breiz, hag a oa brudet evit beza eun den santel. Mamm an hini 'zo bet nevez galvet dirak Doue a oa c'hoar d'an Ao. chalonni Cellier, marvet rener skolaj Sant-Visant. Er familh Regnault e kaved c'hoaz meur a veleg ha leanez. Da heñl skoueriou ken prizius, buhez an Ao. Jozef Regnault a zo bet santel, rust gant levenez, karget a garantez, ha distag diouz madou an douar. Eyel e dad ez eo bet hep foug medesin ar beorien, gant ar vlizidigez-se a c'hell kaout hepken an dud a seurt gantañ.

Kalz eus mignoned an Ao. Perrot o deus e anavezet dreist-holl e kendalechiou ar Bleun-Brug etre an daou vrezel, hag a vo laouen o welout ober eñvor anezañ. Eur mare a voe, evit gwir, en deus kemeret perz e buhez ar Bleun-Brug dreist-holl er bloaveziou 25, 26, 27 : n'eus nemet adlenn buhez an Ao. Perrot ha prezegenn an D^r Cornic nevez 'zo e Landivizio.

An D^r Regnault a vage eur garantez domm evit Breiz. Beajour bras e-pad e vuhez a-bez, e voe ez-yaouank medisin ar c'henta pirc'hirinajou a vremañ d'an Douar-Santel. E touez ar c'halz a vroioù kaer en doa gwelet, ne gawe ket unan ken kaer hag hon hini. Kerzet en deus dre houmañ en he hed. Ne oa pardon ebet dianavez dezañ. Graet en deus an « Dro-Vreiz », ha bep bloaz ez ae da bardona da Santez Anna Wened.

E dad en doa aliet start an Ao. de La Borderie, istorour bras hor bro, da staga gant e oberenn veur. Kement-se a lavar pegement e kared Breiz er familh Regnault. Netra souezus eta e vefe bet gwelet an Ao. Jozef Regnault en hor c'hevredigeziou sevenadurel. Goude ar brezel 14-18, e harpas eus e wella an holl re a labourer evit Breiz, hag e krogas da zeski brezoneg. Unan eus founnusa kenlabourerien ar gelaouenn « *Foi et Bretagne* », e skrive en houmañ pennadoù leun a boell dindan an ano « Ar pardoner ». Bet eo Pezidant kenta Komite Breiz-Uhel ar Bleun-Brug. Drezañ eo e voe degemeret Erwan ar Moal, Prezidant ar Bleun-Brug, gant ar C'hardinal Charost.

Bez e oa eun den eun. Evitañ kaoz Breiz a oa eur gaoz reiz, ha ne dlied ket kaout aon da ziskleria pe a zo just, hep feuka, met hep laoskentez. Ne gare ket treuz varc'hata, na mont dre guz. « E c'hell beza, emezañ, ne blijo ket pe a lavarot, n'eus forz pa zifennit ar gwir. Labourit, ha pa gavje deoc'h bremañ ne servij da netra. Eun deiz e talvezo ho labour. Rak eur gaoz reiz a dle gounit abred pe ziwezat. Arabat terri gouenn ».

Ma ne oa ket an D^r Jozef Regnault o rei lañs e penn an traou, en deus graet ouspenn kennerza an holl dud a youl vat ; henchet en deus kalz a yaou-ankizou e-mesk gwella izili an Emzao.

Mignoned an Ao. Perrot n'e ankounac'haint ket, ha ma vez lidet ar Bleun-Brug e Roazon eun deiz bennak, e talehint da vont da zaoulina war vez an hini en deus labourer mat « evit Doue hag ar Vro ».

H. Poisson.

DISKUIZ !

Dre ma red an amzer didrouzik war e dal,
Ar beleg koz a wel eo bet kaer e vuhez.
En e barrez e kav tud sentus ha leal,
Aketus da vale war gwir hent ar furnez.

Nann ! n'eo ket en aner en devezo stourmet
Epad meur a vloavez e-kreiz an trubuilhou.
Gant Mestr an Ebestel an hadenn venniget
A zoug eun eostad pulh e park an eneoù.

Nag eürus ar beleg gwasket gant an amzer,
Pa vez chomet gredus war roudou ar Zalver,
Pa vez bet kalonek, el labour, deiz ha noz.

Rak, war e dremenven e c'hell laret bemde :
« Tostaat a ran seder ouz aoter an Doue
A bedan da rei din diskuiz ar Baradoz ».

C'hwevrer 1936.

Ao. F. Le Goff,
Person Plouneour-Trez.

Ar barzoneg-mañ, savet gant an Aotrou ar Gov, eun nebeud deiziou araoz e varo, eo bet evidomp e c'heriou diweza. Fromus e vo da lennerien « Bleun-Brug », lenn hag adlenn gerioù diweza ar mignon-se.

Kalonek e-doug e vuhez penn-da-benn, ken kalonek all eo bet dirak ar maro. Sonn evel eur zoudard war an dachenn, en deus resevet dinec'h taol falc'h an Ankou.

D'an 8 a viz C'hwevrer e resevas e zakramañchou dirak holl bennadureziou e barrez. Eur gerig c'hwek a lavaras da bep hini. Goulenn a reas pardon digant ar re o defe bet da c'houzañv euz e berz. Pedi a reas Mikael an Nobletz da rei dezañ eur maro mat.

Mervel a reas d'an 19. D'an 21, ar barrez en he fez hen dougas d'ar vered gwenn-kann gant an erc'h.

Ouz e goll, Breiz he deus kollet unan euz he gwella prezegerien, hag eur skrivanier ampart. Distrei a raimp war e vuhez en eur pennad hirroc'h.

taldir-jaffrennou

Nevez et eo ivez d'ar bed all, ar Barz **Taldir-Jaffrennou**. Marvet eo bet d'e 77 vloaz ha beziet e Keraez d'ar 27 a viz Meurzh. E vuhez a zo bet gouestlet eul lodenn vad anezi da Vreiz, ha merket don en devo e roudou e-doug an 50 vloaz tremenet.

Ganel eo bet e Karnoet (C.-du-N.) e 1879. E studi a reas e Sant-Charles e Sant-Brieg, hag eno e heulias kentelioù brezoneg Fransez Vallée, hor yezoniour brudet.

E 1899 e voe kurunet barz e Cardiff, Bro-Gembre, hag e 1900 goude maro Erwan Berthou, e voe anvet Drouiz-Meur Breiz-Vihan, eur garg hag a zalc'has beteg 1948.

E labourioù breizeg a zo niverus, ha darn anezo a bado, a-dra-zur : barzonegoù, kanaouennoù, peziou-c'hoari, ha skridoù all e-leiz, bet moulet en e gazetenn « **Ar Vro** », hag e gelaouenn « **An Oaled** ». E 1944 e voulas « **Eur wech e oa** », a rō deomp diwar e bluenn, e vuhez penn-da-benn. Skriva 'reas ivez e galleg : « **La genèse d'un mouvement** », « **L'histoire de Carhaix** », « **La Tour d'Auvergne** », « **Carhaisiens célèbres** ».

Kalzig a zarempredou en deus bet ivez gant an ao. Perrot hag ar Bleun-Brug.

Duet eo c'hoaz beteg ennoimp, kelou glac'harus maro an Itron Priel, pried karan-tezus hor mignon Jarl Priel.

En e eñvoriou, daou levr kaer anezo dija, en deus Jarl lavaret deomp, peseurt maouez e oa.

Abaoe meur a vloavez e oa dalc'het war he gwele gant ar seizi. Eur groaz ponner e vo ar c'hleñved-mañ eviti beteg he maro.

Eur c'hallez e oa, met plijout a rae dezi Breiz ha traou Breiz.

Ra blijo gant Jarl Priel digemer amañ hor gwella gourc'hemennou a gafiv.

KELEIER

Emgleo Breiz hag ar reizskrivadur.

N'on ket gwall zouget d'ar brezel, d'an emgann, d'an tabut. Perz mad pe berz fall, peb hini a varno hervez e dro-spered. Méd farsuz kenañ e kavan ar rebech grêt din da veza « eun diktator a spered striz », ha farsusoh c'hoaz pa welan e-touez ar re a ra din ar rebech-se, tud, ha n'em bije ket kredet beteg vremañ, e vijent bet ken chalet gant reolennoù an demokratelèz.

Bez ez eus eur strollad anvet « Emgleo Breiz » pe « Fondation Culturelle Bretonne », bodet ennañ : Kendalh, B.A.S., Ar Falz, ar Bleun-Brug. Labour ar strollad-se a zo bet da genta, klask, gand sikour *deputeed* ha *senedourien* ar vro, rei d'ar brezoneg eur plas brasoh brasa er skolioù. Ar pezh om deuet a-benn da gaoud beteg vremañ, n'eo ket a-walh, evel-just. Nebeud eo, kalz re nebeud, ha koulskoude, kalz gwelloc'h eged n'eo ; ha fiziañs vraz on eus, dre 'forz stourm, e teuim a-benn da zigeri ledannoh dor ar skolioù d'ar brezoneg.

Kerkent ha damzigoret dor ar skolioù, klasket e-neus « Emgleo Breiz » sikour ar vistri hag ar gelennerien, dastum arhanth da rei levrioù-skol pe brizioù d'ar vugale.

Abaoe ar Yaou-Bask emeur krog adarre, evel er bloavezioù tremenet, ha gand aotre ar gouarnamant, da gestal er ruiou, « Evid ar Brezoneg ».

Hervez ar sifrou resavet beteg-henn, gand teñzorier « Emgleo Breiz », dastumet e vo er bloaz-mañ muioc'h a arhanth c'hoaz eget warlene.

Araog fin miz Guere e vo deuet er-mêz eur *geriadur* brezoneg-galleg ha galleg-brezoneg, hag a-benn miz Here e-no an Ao. Sette adembannet « Yéz on Tadou » adreizet da glota gand arnodenn ar B.E.P.C.

Divizet e oa bet gand « Emgleo Breiz » e vije digemeret skrivadur nevez ar Skol-Veur pa vije peur-renket, ha da hortoz hepken, implijet ar « K.L.T. » (nemed e Bro-Wened, evel-just). Onest e'oa, d'am meno, d'ar Bleun-Brug senti ouz ar reolenn-se, pe netuze kuitaad « Emgleo Breiz ». Setu perag eo bet divizet *ganeom* ne vije implijet e paperioù ha kelaouennoù moulet dindan ano ar Bleun-Brug nemed ar skrivadur K.L.T. ha bremañ, tamm ha tamm, hini ar Skol-Veur, pegwir emeur kroget da vuella levrioù ha pennadoù, er skrivadur-se : levr an D^r Tricou : « *Lennom, skrivom ha komzom brezoneg* », pezh-c'hoari an Ao. Noel, « *Mil-Pok* », pennadoù brezoneg « *La Bretagne à Paris* », ha dizale ar *geriadur* am eus komzet anezañ, « *yéz on Tadou* », hag all...

Al lenennoù-mañ am-eus skrivet hebken da ziskleria va menozioù, da zislavared sotonioù am-eus lennet pe glevet, ha da zamma war va hein kement a zo din da zougen, din-me, rener-meur ar Bleun-Brug (ha Kernevad a dad hag a vamm, penn-kil-ha-troad).

N'on ket eur mailh war ar skriva, ha gwelloc'h eo din chom heb c'hoari ra alvez gand va 'fluenn. Méd n'eo ket abalamour ma tisplij din koll va amzer o harzal, eo ne vefen ket gouest da daga.

Gab ar Moal,
Rener-Meur ar Bleun-Brug.

Ar brezoneg en douar santel.

E kerz ar pirc'hirinaj am eus grêt en Douar Santel em eus bet ar joa vraz da weled ez oa bet laketa ar brezoneg e reñk ar yezou braz. E kouent al leanezed karmelited, war gern Menez an Olivez — karmel ar Batez — emañ « *Hon Tad pehini a zo en Nenv* » e touez troidigezioù all ar Batez. Pa 'z eer e kêr Jeruzalem euz kouent Santez Anna d'ar pezh a zo dizoloet euz Gwaz an Deived pe Gwaz Betsaida, — harp emaint an eil ouz egile — e weler staget ouz ar voger eur skritell e brezoneg warni ar pennad euz aviel Sant Yann (v, 1-18) hag a gont deomp pareañ an den seizet.

E Ain-Karim, bro c'hinidik Sant Yann vadezour ar gêrig e-lec'h ma 'z eas ar Werc'hez Vari da weled Elizabeth goude salud an el, e-lec'h ma kanas ar « Magnificat » e weler ivez skritelloù gand ar « Magnificat » e meur a yéz ; met siwaz amañ ne gaver ket a vrezoneg.

Setu m'am eus skrivet d'an tad Fransiskan a zo o tiwall iliz ar weladenn, gweladenn Mari da Elizabeth, evit goulenn digantañ ha ne vefe ket a dro da lakaad ivez eur skritell e brezoneg.

Setu amañ ar respont am eus bet :

† Que le Seigneur vous donne sa paix ! Jérusalem 25/10/55.

Monsieur le Curé,

Etant chargé des « Inscriptions » du sanctuaire de la Visitation à Ain-Karim, le Rme P. Custode m'a communiqué votre lettre du 15 courant, par laquelle vous exprimez le désir très légitime et très compréhensible de voir la langue bretonne représentée à Ain-Karim.

Je vous félicite tout d'abord d'avoir pu accomplir le pèlerinage aux Lieux Saints.

Pour ce qui concerne votre désir, je vous signale que nous avons prévu les inscriptions en 40 langues, d'une part, et adopté d'autre part le principe d'une seule langue par nation existante. Cependant il se pourrait qu'une des inscriptions prévues ne puisse se réaliser pour des raisons particulières, et dans ce cas la langue bretonne pourrait prendre la place. Si l'hypothèse se réalise nous vous ferons connaître les dépenses à prévoir pour l'inscription.

Veuillez agréer, Monsieur le Curé, l'expression de mes religieux sentiments au Christ.

R. P. AURELIO BORKOWSKI,
Custodie de Terre Sainte P.O.B. 4136,
Jérusalem (Old City),
H. K. Jordan (par Beyrouth).

Ar Bleun-Brug, evel just, eo en em gargfe euz an dispignou ha, n'oun ket nec'het, n'eo ket an arc'hant a vankfe pa vefe goulennet digand ar Vretoned.

Kaer e vefe gweled ar « Magnificat » e brezoneg war mogerioù iliz ar wela-denn e Ain-Karim. Poania e raimp da gas ar mennad-se da benn.

V. Favé.

Devezioù-Studi e Ploueg-ar-Mor.

E-pad vakañsoù Pask ar bloaz-mañ hon eus gwelet bodadegoù ha devezioù-studi a bep seurt eun tamm dre-holl. Eun eurvad am eus bet da heuilh penn-da-benn an devezioù-studi a oa bet aozet gant ar gazetenn « Skol » e Ploueg-ar-Mor, du-hont e Bro-Ouelou. Kavet em eus bet eno 34 a dud, en o zouez 16 kelenner pe skolaer hag 11 a gerent, al lodenn vrasa anezou euz Ploueg. Hag en gwirionez talvezout a rae ar boan mont di, ken en abeg d'an danvezioù studiet, ken en abeg da ampartiz ar gonfertañserien.

An Ao. Loeiz ar Floc'h, aluzener Skol Sant-Pêr, e Sant-Brieg, a gomzas dimp diwar-benn talvoudegezh ar « C'hultur » evit buhez an den hag e religion. Ya, « ar Brezoneg hag ar Feiz a zo c'hoaz Breur ha c'hoaz e Breiz ». Dimp da gompren. Pep bro, pep pobl he deus eun doare dezi hec'h-unan da veza ha da zisplega he zoñjou hag he zantimanchou dre oberou an arz : an tier hag an ilizou, ar statuoù hag an taolennou, ar muzik hag an dañsoù. Siwaz, en deiz a hizio e weler ar « C'hultur » o vont war gwaza en Breiz ha dre ar Bed a-bez. Poueza a reas kalz ar prezeger war ar siou fall a zeu da heul kement-se : poblou dincerzet ha digalonekaet, en em daol d'an alkool, pe a glask divroa hep ezomm. An divroa n'eo ket hepken eur gudenn ekonomikel, met bez' ez eo ivez eur gudenn psikolojikel. Betek-henn e oa bet kuzet ar wirionez-se ouzimp. Dao e vo dimp soñjal warni, ha labourat !

Ret eo kregi gant ar Skol. Setu aze avad eur gudenn ha n'eo ket es da ziluzia ! A gav deoc'h moarvad ? Ma vije c'h bet o selaou an Ao. Kalvez, rener skol Sant-Erwan e Ploueg, ne lavarjec'h ket se. An Ao. Kalvez en deus baleet kalz dre Europa ha tro en deus bet da studia kudenn ar skolioù er broioù bihan : e Kembre (Breiz-Veur) ; e Friz (Bro-Holland) ; er Slesvig (Alamagn). O kemer skouer diwar ar pezh en deus gwelet du-hont e tisplegas brao ha sklêr penaoz e vije tu da zeski da vugale Breiz-Izel lenn, skriva ha konta dre ar Brezoneg ha da zeski dezo tamm ha tamm eur Galleg reiz ha c'hwek. Ar vugale-se a vije ken desket hag ar re all war gement o defe ezomm evit beva. Muioc'h desket zoken, pegwir e ouijent diou yez, ha pegwir c'hoaz o dije

muioch a ézaman da zeski yezou all diwezatoc'h, ar Saozneg pe an Alamanez. War-lerc'h eur profesion a feiz ken sklêr ha ken didroidell — ha ken kalonek, ret eo hen anzay — e voe roet da bep hini frankiz da zisplega e zôñj. Ne oa bet den avad evit dislavarout an Ao. Kalvez. Kements-se a ziskouez e oa bet studiet mat ar gudenn gant an Ao. Kalvez, hag ez eo prest tud'zo e Breiz-Izel da zegemer doareoù-skoliata nevez gant ma vo kinniget dezo eun dra bennag sirius.

Herve Konan.

Bleun-Brug Bro-Dreger.

D'an 20 a viz Mae eo bet lidet, e Perroz, Bleun-Brug Bro-Dreger, dre eun amzer' dudius.

An ao. Kadoudal, evel kustum, hag an ao. Bonte, kure e Perroz, a zo bet diazeourien wella ar Bleun-Brug-se. Meuleudi a zo dleet dezo, da veza renket ken mat pep tra.

Diouz ar mintin, kenstrivadegou evit ar re vihan hag ar re yras.

An oferenn, evel e Kallag warlene, a zo bet plijet kenañ.

Goude lein, dirak milieroù a dud, e voe c'hoariet koroll, kan ha muzik, ha taolennou savet gant an ao. Bourdellès diwar buhez sant Kireg, a voe eun dudi da weled ha da gleved. Eur brosesion, ha bennoz ar Sakramant, a glozas ar gouel.

Eun Eskob nevez.

Eul levezeg eo bet evidomp gouzoud eo bet an Ao. Chaloni Bellec, Viket-Vras Kemper, anvet da eskob e Saint-Jean-de-Maurienne. Eun enor braz eo kement-se evid Breiz-Izel. Ra gavo amañ, an Ao. 'n Eskob Bellec gwella ha doujusa gourc'hemennou ar Bleun-Brug.

An Ao. Kardinal Tisserand.

Bet o rén pardon Sant Erwan e Landreger, hag o weladenni Frered Lamennais, e Jersey hag e Ploërmel, en deus hemañ goude, grêt e dro-Breiz a gevred gant Superior-Meur Frered Ploërmel ar R. F. Elisée-Rannou (eur Breizad euz Gouezeg). Plijadur vraz en deus bet o weled hor bro, hon arzou kaer hag o kleved komz ha kana e brezoneg. Gouzoud a reer eo an Ao. Kardinal Tisserand uhella den a zo en Iliz, goude hon Tad Santel ar Pab. Goulennet en deus kaoud « yez hon Tadou ».

Enor da Laz-Kana Landi.

Nevez bet o kenstriva e Paris, en deus bet al laz-kana-mañ ar priz kenta evid ar Frañs a-bez. Kanet o deus bet e brezoneg « An diou Vreiz » hag « Ar Pilhaouer ». Eur respont kaer, neketa ! d'eur varnadenn zisprizus nevez beza bet moulet en eur gelaouenn euz Breiz.

Kuzul-Meur ar Finister.

Kreñv ha kalet en deus hemañ adarre savet e vouez da c'houlenn d'hor yez eur plas ledannoc'h er skoliou. Kaset en deus e c'haly d'ar ministr. Ha klevet e vo ?

LEVRIOU NEVEZ

Or mignon an doktor Tricoire, euz Châteaubriant, e-neus nevez embannet eul levr nevez da zeski brezoneg. Anvet e-neus e levr : « *Komzom, lennom ha skrivom brezoneg* ».

An D^r Tricoire n'eo ket Breizad. Med dimezet d'eur Vreizadez, eo bet fellet gantañ deski or yez. Her grêt e-neus ha grêt mad zoken.

E zoare deski, eun tammig diouz skwer « Le breton par l'image », a zo ijinuz ha plijuz kenañ. Pep ger nevez, ha peb frazenn nevez a implij a zo harpet war skeudennou savet gantañ e-unan. Evelse e teuer, evel en eur hoari, da zeski buan eun toullad mad a heriou hag a frazennou ha da gomz ar yez mad kenañ.

Alia stard a reom or mignoned da brena al levr-se, ha d'e ingala en-dro dezo. N'hellfed ket labourad gwelloc'h evid ar brezoneg beo ha yah.

Savet eo dreist-oll evid ar vugale. Gand an doare-se eo e-neus an D^r Tricoire desket brezoneg d'e vugale. Diwanet eo bet eta al levr diwar skiant-prena, ha gouzoud a reer peseurt frouez e hell dougenn.

Al levr-mañ eo an hini kenta euz eur rummad levrioù skrivet gant skrivadur nevez goulennet gand ar Skol-Veur. Tostoh ouz ar brezoneg konkalz e vo esoh an doare-skriva-mañ da geled er skoliou. Esoh ive da le rag o tistaga ar gerioù evel m'int skrivet e vezor asur d'o distaga en e doare ma vezint komprenet gand ar bobl.

Evid kaoud al levr skriva da : D^r Tricoire, rue du Couëré, Châteaubriant (Loire-Inférieure).

Mil-Pok.

Mil-Pok a zo eur pezh-c'hoari embannet, er skrivadur nevez gand Emgleo-Breiz, bet savet gand an Ao. Noël person Plounevez-Kintin. Al levrig a zo e gwerz. Her goulenn digand : F. C. B. Boîte Postale 17, Brest. — Eun dastumad pennadougou brezoneg diwar « Skol ar Brezoneg » a zeu raktal war e lerc'h.

LIDOU SAKR

de profundis

War don : *Petra* ' zo nevez e ker Ys.


1. Euz an islonk, Aotrou Doue,
War-du Ennout e krian-me.
Aotrou, selaou va galvadenn !
Digor da skouarn d'am fedenn.
2. Aotrou, ma n'ankounac'hez ket
Va fallagriez, va fec'hed,
Piou c'halla herzel dirazout ?
Piou eta a c'halla padout ?
3. En da gichenn 'mañ ar pardon :
Fiziañs am eus en va Doue :
Bepréd euz e c'hér sur ez on.
Va ene a c'hortoz Yahve.
4. Emaon bepréd ouz her gortoz.
Ennañ startoc'h ez eo va feiz
Eget kredenn ar gedour-noz
E distro sur ar goulou-deiz.
5. Rak Ennañ, 'mañ ar vadelez,
puilh ez eo E zasprenadur
Hag Izraël, E grouadur,
A vezo diereet a-bez.

Moualc'h ar Sklêrder.

Aotre da voula.
Kemper, 5 a viz Meurzh 1956.

V. FAVÉ,
Viket-Vraz.





klevit mad !

D'ar 17 a viz Even

BLEUN - BRUG LEON E KLEDER

azaleg 8 h. 30 : Kenstrivadegou ;
 da 11 h. : Oferenn-bred ;
 da 14 h. 30 : e maner Troñjoli :
 abadenn **Koroll ha kan.**
 da 21 h. : C'hoariva brezoneg.

D'ar 24 a viz Even

BLEUN - BRUG KERNE E KOMBRIT

azaleg 8 h. 30 : Kenstrivadegou ;
 da 11 h. : Oferenn-bred ;
 da 14 h. 30 : Koroll ha kan ha « **Jeu scénique** ».

D'an 29 a viz Gouere

BLEUN - BRUG BRO - WENED E KARNAG